



# CANTIC SPIRITUEL

*Engloar DOUE hac an ITRON VARIA KERDEVOT, pehini e  
deus eur Chapel caër en Parous Ergue-Vras en  
quichen Quemper-Caourintin, e pehini era bemdez  
Miraclou bras.*

Voar ton : *Santes Mari, etc.*

*Vos omnes fitientes, venite ad aquas. C'hui oll pere hoc'heus  
sec'het deut da esa d'ar Feunteun a vuez.*

Tad, Map ha Speret-Santel, tri Ferson en eun Doue,  
M'ho supli, a vir galon hac a greis va ene,  
Da diriga va memor ha ma intentamant,  
Ma composin eur c'hantic d'ar Verc'hes puissant.

Biscoas, Christenien, sioas ! n'hor boa brassoc'h ezom  
Da suplia hor Salver hac ar Verc'hes e Vom,  
Da rei ar c'hraç d'hon Impalær da veza victorius  
Var e oll ennemiet, adversourien Jesus.

Tristidiguez a vela, allas ! pell so er bed,  
Quernez hon eus bet ivez comançet da velet,  
Asista a reomp bemdes eu interramancho  
Demeus a dud hor c'hanton, hac en ho servicho.

N'en deus nemet ar vocen n'hon deus qet c'hoas guelet  
En hon touez er vro-mâ, Doue ra vezo meulet !  
Pedomp an Dreindet Santel hac ar Verc'hes Vari,  
Ma vezimp guiti buan preservet diouti.

Ar voyen d'en em assuri eus ar guir joausdet,  
Da bossedi da jamæs eur peoc'h hir ha parfet,  
Eo suplia ar Verc'hes da bidi evidomp,  
Pa na veritomp siouaz ! e selle Doue ouzomp.

Meur a blaç santel dezi er bed a so savet,  
Eleac'h ma zeo enoret, caret hac invoquet,  
Eleac'h ma accord Doue, dre e intercesion,  
Graçou bras d'ar bec'herien p'e fedont a galon.

Hep choqui e nep façon Ilis santel ebet,  
Me souten, goude cals a dud ha cals lealdet,  
Emedi en hor c'hanton an Ilis devota,  
E deus ar Verc'hes Vari hac ar principala.

Coms a ran deoc'h Christenien, eus an Templ biniquet,  
Tost da Guemper-Caourintin, Kerdevot guir hanvet,  
So batisset d'ar Verc'hes dre guir devotion,  
An ilis ancienna e deveus er c'hanton.

C'hui Ergueiz-Gaberic, a bossed ar c'haera  
Demeus an oll tensoriou a so var ar bed-mà,  
Ar sourcen eus a c'hraçou an Drindet adorabl,  
Elec'h ma arru bemde Miraclou surprenabl.

Eun histor a rapporter, dign da veza discleriet,  
Penaus ar Verc'hes Vari, evit ma vise goueet  
Er c'hantonio divar dro, Santela plaç e voa,  
Elec'h ma clever pec'hour gant carantez ha joa.

A laras expressamant d'eur munuser yaouanc  
Ober dezi eun ouvraich a vise excellent,  
Eun ouvraich ar parfeta a ouisie da ober,  
Hac e vise paet en Env gant Jesus e Map-ger.

Pa vise achu gantan, en ambarche timat  
En eur chaloup var ar mor : chelaouet ar Miracl,  
Ha Doue e c'honduje d'an devota Ilis  
A oa d'ar Verc'hes Vari batisset en Breiz.

Pa voa erruet var vor ha gueleit gant an dut,  
E teue ar Veleyen, Fabligen a bartout,  
Mæs ne dostas ouz nicun quen na voa arruet  
Person an Ergueiz-Vras ha Fabric Kerdevot.

An ouvraich santel neuse d'an douar a abordas,  
Ar Fabric a Kerdevot hep dale er c'hemeras  
En Kerdevot e voa rentet gant eur pomp magnific,  
Laqueet eoc'h an Auter da velet d'ar public.

Evurus bras, o cavan, habitantet Ergue,  
Da veza, dre breferans d'an oll dud ar c'hontre,  
Enoret eus eun Ilis qen caër ha qen zantel,  
Mommen an oll miraclou ha graçou eternal.

Paroissianis Elliant a ouffe lavaret  
Peguer santel ar plaç-man d'ar Verc'hes binniquet,  
Na dleont qet anconât ar rest eus ho bue  
An obligation o deus da Vari, Mam Doue.

Attaqet oan gueichal gant eur c'hlenvet cruel,  
Eur pestilanc dangerus, commanç a rent mervel;  
Quen stanc e varvent bemde quen a vanque loënet,  
Ha quiri, d'o c'hass d'ar vorc'h, d'an douar binniquet.

Pa veljont an danger bras e oant oll da vervel,  
O devoue recours ouzoc'h Guerc'hes Sacr ha Santel,  
En em voestla a rejont gant cals a devotion,  
Da Kerdevot d'ar pardon gant o Frocession.

Er momet ma partijont eus parous Elliant,  
Da vonet da Kerdevot, o doa soulajamant.  
Rentet pare ha dispos, ha yac'h eus o c'hlenvet :  
Guerc'hes Glorius Vari, ra viot binniguet.

Ober a rejont neuse eur vœu perpetuel,  
Ma tenjent eur voech bep bloas da Erguez d'ho Chapel,  
D'ho frugarecat, Guerc'hes, demeus ho tonæson,  
Nobl ha partabl Beleyen gant o Frocession.

Meur a den bet massacret, ha voar ar mor beuzet,  
Dre ho calloud, o Guerc'hes ! so bet ressucitet  
Cals a dud, dre accident privet eus ar guelec,  
O deveus e Kerdevot ar sclerijen cavet.

Dan dud troublet a squiant, ha memes foll rentet,  
Kerdevot so ordinal eur remet assuret ;  
Hac an traou a ve laëret, pa vent gouestlet dezi,  
Na ell qet e nep sæçon all laër o dransporti.

Davantach, aneb a goues siouas en accident,  
Pe dalc'het var ar guele gant clenvet languissant,  
So guelleet e Kerdevot, pa zeuont a vir galon  
Da c'houlen digant Mari e intercession.

Er baroujou divoar dro eun nombr bras a guëriou,  
En danjer da veza laquet en poultr hac en ludu,  
Siouas ! dre eun tan terrubl, a so bet sicouret  
Er momet ma zint d'an Templ a Kerdevot gouestlet.

Beza eus tud var an douar pere dre eun domach,  
Pe dre eur fortun benag a gol prest o c'hourach,  
Pe ma zint bet pell amser gant clenvet languisset,  
Pe trist, ha melconiet, casi disesperet.

En Kerdevot e cavent ar gonsolation,  
Elec'h o zistridigues, m'ar deuont a vir galon,  
Prosperite er bed-mân, er bed-all joausdet,  
Rentet joaus ha contant, ha parfet a speret.

Ouspen ar graguez dougueres, pa vent estranj en poan  
O clasq digas voar ar bed o fugale bihan,  
A so bet dre Kerdevot diboaniet hep dale  
Dre voyen ar Verc'hes Sacr : meulet vezo Doue.

Mæs beteg vreman n'em eus quasimant laret netra ;  
Chetu ar c'haëra miracl hac ar principala,  
Ar pec'herien obstinet a chench oll o goal stâd,  
Pa zeuer d'o recommandi d'ar Verc'hes honorabl.

Me a brouvo quement-mâ dre ar personachou  
So bet ganti sicouret en o necessiteou,  
Me zisquei doc'h sclæramant quement am eus laret :  
Clevit attantivamant, m'ho disclerio dec'h net

Eur soudard eus a Guemper, hanvet aotrou Deschamps,  
O visita Kerdevot er c'hoarais divezan,  
En deus laret d'ar Fabric ez e bet sicouret,  
Gant Mari en he gampagn er gouan-mâ tremenet.  
Ar soudardet a voa bet gant an aotrou Duguay,  
Na allent qet rancontri an hent da zont d'ar guer,  
En danger da veza collet var ar mor perillus,  
En em offret o deus bet d'ar Verc'hes gloriüs.  
Deut int d'e zrugarecat, pa int deut da Guemper,  
Roet o deus dezi en presant eur chapelet caër,  
Ha roet eun offrand-all c'hoas ha guers offerennou,  
Soutenet-y c'hoas, Guerc'hes, en o oll combatou.  
Er mis c'huevrer diveza chilaouet me ho ped,  
Eun den a Dreo Langolen eus a barous Briec,  
O vont gant e varc'h eun deiz d'ar Foar da Gastellin,  
Oa var ar poent dangerus en eur stær da veusi.  
Dre bermission Doue e arruas eun den,  
O velas o vont en traou gant an dour, marc'h ha den,  
Var e zaoulin e stouas, da Vari o gouestlas,  
En e zi a Kerdevot ebars en Erguez-Vras.  
Prest e voant da yeza maro pa voant gouestlet dezi,  
En instand ma int gouestlet, sicouret int gant-hi;  
Eun dra, eme an den-mâ, dre bermission Doue,  
Evel eur voguer creö o arretas en Ee.  
Eun nombr bras eus a dud a Guemper-Caourintin,  
A Barrous Sant-Evarzec hac a Ergue-Vihan,  
A Ergue-Vras, a Vriec, a Barres Kerfeuntun,  
Demeus a Barres Elliant hac a Barres Cuzon,  
Deus o c'hlenvejou marvel a so bet dilivret,  
En o afflictionou a so bet consolet,  
Deus a pleuresi, terryen, pourpr ha peb seurt clenvet,  
E Kerdevot ez int bet antieramant yac'heet.  
Eur Belec, originer a Ergue-Gaberic,  
En deus bet e Kerdevot eur yec'bet magnific;  
E spaç eus a bemp sizun e bet var ar guele,  
Dilavar, abandonnet gant quement en guele.  
Eur vourc'hises a Guemper, siouas! dre accident  
Rentet mudes pemzec de, privet eus ar parlant,  
So bet gouestlet en Ergue d'ho Chapel binignet,  
Dre ho craç, Guerc'hes santel, e deus bet ar prezec.  
Eus a Ergue-Gaberic eur vroec borgnes rentet  
Gant eun taich var he lagat, savet dre eur c'hlenvet,  
E Kerdevot er guelc'has gant an dour souveren  
Eus a feunteun ar Verc'hes, en deus bed sclerijen.



Breman eus bet unec vloas da Vouel ar Chandelour,  
Gant curun hac avel-foll e voa couezet an tour,  
Ma voa surprenet eun den, allas ! diandan ar vein ;  
Daouzec cargat assuret a voa couet var e guein.

Consoude e voa clevet o crial, o lamani,  
Oc'h en em recommandi deoc'h, Guerc'hes puissant,  
Ma voe dre ho cuir sicour ac'hane dilivret,  
E oll isily briset, brusunet, massacret.

Ar biana eus ar vein voa capabl d'e laza,  
Pa ne m'hoc'heus bet miret, ô Itron Varia !  
Ma covessaas, quent mervel, gant cueuz e bec'hejou ;  
Breman en deus an honor d'ho guelet er joayou.

Eun den a Barres Elliant prest da goll e broces  
Gant eun amezec dezan dre vil traïtours,  
A deuas da Kerdevot da visita Mari :  
Goneet en deus e broces dre voyen anezi.

Eus a Ergue-Gaberic eur vrœc fur ha prudant,  
E deus bet dre eur c'hlenvet collet e jugeamant,  
Mæs quen terribl quen na voa ret d'e ameseyen  
He divoall hac he staga en e zy gant querden.

N'en deus den var an douar quen calet a galon,  
E guelfe er stad trist-mâ hep caout compassion,  
O chascha var bleo e fenn, hac o straqual e zent ;  
Ma Doue, en so terrubl coll ar guir sclerigen.

E friet hac e c'herent ouz e c'honsideri,  
Na zebre na ne eve, torret e isili,  
Defiguret e bisaich hac e sellou troet,  
E gouestlas e Kerdevot d'ar Verc'hes binniguet,

Incontinant e deus bet squiant a neve flam,  
Jesus ra vo biniguet, ar Verc'hes sacr e Vam,  
Hac e deus testamantet eur vros eus e dillat  
Da enori ar Verc'hes, ha d'e zrugarecât.

Ar groaguez a ve poaniet en o guilioudou,  
So sicouret gant Mari bemnos, bemde-c'houlou,  
Hac o bugale viban, pa vent simpl, languissant,  
P'o recommander dezi, o deus ar vadisiant.

Ho feunteun, Guerc'hes Vari, a so bras e effet,  
Guellaat a ra d'an derc'hen, catar, pep seurt clenvet,  
Davantaich, ouz e scarza, e deus pep magueres  
Da vaga o c'hrouadur abondanc eus a læz.

Dont a ra da Kerdevot bep guener eus ar c'horais  
Eun nombr bras a dut devot, bep sul, bep gouel, bemdeis ;  
Pedet nôs ha de ar Verc'hes ma ho quero er gloar,  
Ha quement so devot dezi var an douar.

